

KANTIK SANT YAN

DISKAN :

Sant Yan, hor Patron eürus,
 Profed, merzer, kannad Jezuz,
 Goulennit d'eomp digant Doue } bis
 Yec'hed ar c'horf hag an ene. }

1

Abaoue m'eo krouet ar bed,
 Biskoaz, nan biskoaz n'eus gwelet
 Den ebet par d'eoc'houi, Sant Yan, } bis
 Jezuz hen lavar e-unan. }

2

Yaouankig flamm, el lec'hioù gouez,
 Fzoc'h karet gant an Elez.
 Ha c'houi zo pur korf hag ene, } bis
 Pell dioc'h an dud, tost da Zoue. }

3

Ha kalet eo ho pinijenn :
 Kroc'henn eul loan war ho kroc'henn
 Morse na gwin na tamm bara, } bis
 Grizioù c'houero evit beva. }

4

Displega 'rit lezenn Doue
 Splann e tiskouezit hent an nenv.
 'Vit gounit kalon ar pec'her, } bis
 Ho prezegennoù 'zo pounner. }

5

« Ar vouc'hal zo harp d'ar wezenn, »
 A livirit d'ar bec'herien,
 « Ma tale-it da jench buez, } bis
 Doue a skoio didruez. » }

